

# KANTIK

## ILIZ NEVEZ PORNALEC

DISKAN :

Ni kristenien Pornalec, en deis-man kaer meurbet,  
A ginnig deoc'h, o Jezuz, eun ti nevez-savet :  
Bezit perc'hen hon iliz ha deut gant kalz elez  
Aman 'bars enn tabernakl da jom enn hon touez.

1

Allas ! Doue gallouduz, da rei deoc'h digemer  
Eur palez oll-alaouret a ve c'hoaz re zister ;  
Ho tron eo ar baradoz, ann douar ho skabell,  
Ha stered ar firmamant eo perlez ho mantel.

2

Deut gouscoude, o Jezuz, ha dre ho madelez  
Grit eur baradoz bihan euz hon iliz nevez ;  
Ho plijadur eo beza e kreiz ho pugale,  
Ha ni a gavo bennoz e kichen hon Doue.

3

Dre gomzou sakr hon Eskop ha dre nerz sin ar groaz  
Ra jomo stard pep pilier epad kant ha kant vloaz :  
Diouz an avel, ar gurun ha diouz peb goal amzer  
Diouallit ar mogerious, an tour hag ar c'hleier.

Ha c'houi, Guerc'hez benniget, ni ro deoc'h eun aoter,  
 Bepret hor bezo fizians e Mam douz hor Zalver ;  
 Er glac'har, el levenez ni zeuio d'ho pedi,  
 Ann eil plas enn hor c'halon a zo deoc'h, o Mari.

C'houi ive hor Sant Patron, a zigasaz e Breiz  
 Kelou mad ann Aviel ha sklerijen ar Feiz,  
 Hirio hag e peb amzer, Aotrou braz Sant Alor,  
 Ra vo meulet hoc'h hano euz ar groaz verr d'ar mor.

Skuillit mil ha mil bennoz var oll dud Pornalec,  
 Var ar pastor, ann denved, var peb den kalonec  
 En deuz great eunn aluzen 'vit sevel hon iliz :  
 Ra gavint er baradoz digemer ha lojeiz.

IMPRIMATUR :

Corisopiti, die 20 Maii 1879.

**J. JÉGOU**, Vic. gen.